

HC_0017_Ur Plac'h yaouank diwar ar maez

Scottish

Ur plac'h yaouank diwar ar maez
lâr ar miliner lâr an aotrou maer
Ur plac'h yaouank diwar ar maez
zo aet d'ar vilin un nozvezh

toull ar vilin p'oa erruet
ar miliner a oa kousket :

« petra'zo ganeoc'h 'n ho sac'had
pa erruit ken diwezhat ?

Kerc'h ha segal ha gwinizh du
p'emañ ho milin war he zu

O war he zu pe n'emañ ket
ho sac'had-c'hwi a vo malet

*Dre ma kouezhe ar greun er gern**
Ar miliner a boke ferm

*Ha dre ma kouezhe ar greun er bank**
Ar miliner a boke stank

Dre ma kouezhe ar greun er sac'h
Ar miliner boke d'ar plac'h

« dousik dousik 'ta miliner
torret'peus las ma zavañcher !

kemenerien a zo barz ar vro
c'hwi a glasko me baio !

seitek devezh ha triwec'h miz
 oa aet an aotrou da Bariz

a benn ma tistroio d'ar ger
 oa chenchamant 'barzh ar maner

chenchamant'zo er maner-mañ
ha ma itron, pelec'h eman ?

'mañ barz ar gambr en uhelañ
 tommañ he mab an terruplañ

ur paotr bihan glas e lagad
ne ouezer ket piv a oa e dad

ne ouezer ket ket piv a oa e dad
ar miliner a oar se mat.

* je ne dis pas ces 2 couplets mais ça pourrait être sympa de les ajouter !